

2vet Sul Fask

“Ar peoc’h ra vo ganeoc’h!”

Breudeur ha C’hoarezed,

D’an diwezh an eizhved-mañ Pask – el liderezh omp atav e deiz Pask- e fellfe din sachañ hor evezh war 3 efed eus an Adsavidigezh a zo er pennadoù kinniget d’hor prederiañ.

Da gentañ, gwelomp holl-asambles penaos e krog Adsavidigez Jezuz ur grouidigezh nevez. An natur deneel a ya e-barzh en ur ment nevez. N’he deus ket denelezh adsavet Jezuz ar memes perzhioù hag a-raok an Adsavidigezh. Bremañ e c’hell Jezuz mon war wel ha mont diwar wel evel-se; gallout a ra bezañ amañ a-greizh-holl e-touez an dud ha da c’houde mont diwar-wel. Er pennadennoù hag a ziskouez an Adsavet, e welimp anezhañ o tebriñ pesked, evit diskouez deomp n’eo ket un tasmant hag en deus evit gwir ur c’horf. Er pennad hiziv, e c’hell Tomaz stekiñ korf Jezuz en deus dalc’het roudoù ar Basion. Denelezh Jezuz Adsavet he deus perzhioù all eget ar re e zenelezh a-raok an Adsavidigezh. Evit lavarout an dra-se e mod all, n’eo ket mui e zeneleh adsavet bevennet gant redioù an egor hag an amzer.

Kavout a reomp an elfenn nevez-se er jestr a ra Jezuz war e Ebestel o c’hwezhañ warno : « Goude bezañ lavaret kement-se, e c’hwezhas warno hag e lavaraz dezho : ‘Degemerit ar Spered Santel.’ » Ar jestr-se eus Jezuz o c’hwezhañ war e Ebestel a c’hell kas soñj da daou dra : da gentañ, un oberenn a grouidigezh ; goude bezañ krouet an den diwar douar e penn-kentañ Levr ar C’heneliezh, e c’hwezhañ Doue enañ evit reiñ dezhan un ene . D’an eil, hervez Aviel Yann, e c’hell bezañ un dave da darvoud ar Pantekost, liammet gantañ ouzh an Adsavidigezh, o lemel kuit an 50 devezh a zisparti an daou zarvoud. Ma seller ouzh an c’hwezhañ-se eus Jezuz war e Ebestel evel ouzh un ober krouidigezh, e soñj deomp ez eo ur grouidigezh nevez a ginnig Jezuz, dre e Adsavidigezh, d’e Ebestel.

Erfin, ar grouidigezh nevez-se, digoret gant an Adsavidigezh, a ginnig ivez un amzerelezh nevez, merket gant resisted Sant Yann, da lavaret eo e c’hoarvez an diskouezadeg-se d’an deiz kentañ eus ar sizhun. Emaomp neuze e penn-kentañ un amzerelezh nevez, ur penn-kentañ nevez.

Da eil, e fellfe din lakaat ar gaoz war prof ispisial Krist adsavet roet d’e Ebestel ha d’hor bed, a zo prof ar peoc’h. Er pennad hirio, Jezuz a ro div wech ar peoc’h d’e Ebestel : « Ar peoc’h ra vo ganeoc’h », emezañ dezho. Neuze, e ro ar peoc’h un trede gwech da Domaz. E ziskouezadegoù all ar C’hrist Adsavet e weler anezhañ adarre o reiñ ar peoc’h-se a zeu eus an Adsavidigezh. Petra eo e zalvoudegezh ? Krediñ a ran eo ster pennañ ar peoc’h-se degas ar peoc’h e kalonoù an Ebestel o deus dilezet Jezuz, a tec’het e-pad ar Basion. En em gavout a reont dirak ar goulenn-mañ : “Dre ma’z eo bev adarre Jezuz, penaos en em zalc’ho en hor c’heñver ni hag hon eus e zilezet ?” Ar peoc’h roet gant ar C’hrist Adsavet a zo, dreist-holl, ur pardon evit difealded ha tec’h an diskibien. An Aotrou a ro dezho e beoc’h hag o unvaniñ gantan e-unan ha gant Doue.

Ar mab den a zo, dre e natur, graet evit bezañ e darempred. Met an holl zarempredoù a zo diazezet war framm hon darempred gant Doue. Ha ma vez digempouezet hor darempred-se gant Doue, neuze hon holl darempredoù all a vo nullet. Setu ar pezh a weler bemdez en hor bed. Hep Doue, e teu an dizemglevioù, an emgannoù hag ar brezelioù. An dud, evit o lod, n’o deus nag ar varregezh nag an nerzh da grouiñ o-unan un darempred reizh gant Doue, ar pezh a levezon kalz e vuhez hag hor c’hevredigezh. Doue hepken a c’hell reiñ deomp ar peoc’h diazez-se, mammenn ar peoc’h en holl dachennoù all. “Ar peoc’h ganeoc’h” a dalv neuze n’eo ket hepken emañ an Aotrou oc’h adaptout ar gommunion gant e ziskibien difeal er mare-

mañ, met ivez e tegas d'ar bed ar c'henemglev gantañ e-unan, ar pezh a framm hon darempredoù gantañ, war bouez an holl zarempredoù all en hor buhez.

E-keñver ar prof-se a beoc'h eo dedennus sellet ouzh an diviz gant Tomas. Tomaz eo an hini a nac'h krediñ ken n'en devo gwelet e-unan an Hini Adsavet ha ken n'en devo gellet gwiriañ ez eo ar Jezuz Adsavet ar memes hini ha Jezuz en deus gouzañvet ar Basion. En tu all d'an douetañs a zistroin warni, e tiskouez deomp un dra : e rank Tomaz, evit dont da grediñ e Jezuz Adsavet, bevañ ar Basion n'en doa ket bet da welout.

Breudeur ha c'hoarezed, ne c'hellomp ket mont d'an Adsav hep tremen dre ar Basion ; da lavaret eo, ne c'hellomp ket mont d'an Adsav hep tremen dre ar Groaz. Ar peoc'h roet da Domaz n'eo ket hepken ar pardon evit e zilealded, an adunvaniñ gant Doue, hag ar pardon evit e douetañs, met ivez ar peoc'h abalamour m'eo erruet a-benn ar fin, e unann d'ar feiz en Adsav. Un dra dedennus all zo en istor-mañ : Tomaz eo an hini a nac'h krediñ hep gwelet, da lavaret eo, Tomaz eo an hini a nac'h testeni an Ebestel. Dre en em ziskouez e-unan da Domaz, Jezuz en deus kadarnaet testeni an Ebestel. Adalek bremañ e vo tu da grediñ en Adsavidigezh Jezuz dre an testeni abostolek, a zo diazez an Iliz, evel ma lavarar bep Sul er Greto : « Me gret en Iliz a zo unan, santel, katolik hag apostolek ». Amañ e kredomp holl en Adsavidigezh Jezuz dre ar feiz treuzkaset deomp hag a zo diazezet war testeni an Ebestel hag o deus gwelet Jezuz adsavet da vev.

Hag e c'hellomp displegañ en ur mod all perak en deus Tomaz lakaet e vizioù e kostez Jezuz An tu toullet-se a denn splann d'ar Basion, met ivez da zakramantoù ar Vadeziant hag an Eukaristiezh, dre ma welas Sant Yann dour ha gwad o redek eus an tu digor-se, arouezioù sakramantoù ar Vadeziant hag an Eukaristiezh. Ma kred Tomaz en Adsavidigezh dre lakaat e zaouarn e kostez toullet Jezuz, e talvez ivez e c'haller mont betek an Adsavidigezh dre ar sakramantoù, dreist-holl ar Vadeziant hag an Eukaristiezh, hag a gas ac'hanomp da Adsavidigezh Jezuz, hag a zeu ivez eus Adsavidigezh Jezuz. Testeni an Ebestel a zo misioner-kennañ, rak e-keit ma vezont o vevañ an Adsavet e embannont ar c'heloù mat eus an Adsavidigezh. Kement-se a dalv ne c'hellomp ket dispartiañ darvoud ar C'hrist adsavet diouzh an nerzh misioner a zeu dioutañ. Dont a ra mision an Iliz eus galloud an Adsavidigezh. Krediñ en Adsavidigezh Jezuz hep he embann eo diglok. Embann ar C'hrist hep bezañ bevet an Adsavidigezh a zo diskiant.

A-raok bezañ misioner e ranker bezañ bevet, bezañ savet, un darempred gant Jezuz hag o deus bevet an Adsavidigezh en un doare pe un doare all. Setu perak, Breudeur ha C'hoarezed, ar Pantekost hag a gas an Iliz war e vision, a echu ar prantad Pask. Ret eo d'an Ebestel bezañ stummet da gentañ en emdroadur Jezuz Adsavet araok ma vint kaset da vision er bed.

Ra greñvafe skeudenn sant Tomaz, an hini a prederomp hiriv, hor feiz en Adsavidigezh Jezuz hag hor startijenn evit kreñvaat hol lañs misioner. Amen!

2^{ème} Dimanche de Pâques

« La paix soit avec vous. »

Frères et Sœurs,

Au terme de cette octave de Pâques, qui fait que nous sommes toujours liturgiquement dans le jour de Pâques, je voudrais attirer votre attention sur 3 effets de la Résurrection, présents dans les textes proposés à notre méditation.

En premier lieu, je voudrais regarder avec vous le fait que la Résurrection inaugure une nouvelle création. La nature humaine entre dans une autre dimension. L'humanité ressuscitée de Jésus n'a pas les mêmes propriétés qu'avant la Résurrection. Désormais, Jésus peut apparaître et disparaître comme cela ; Il peut être présent d'un seul coup au milieu des personnes et disparaître. Dans les récits qui nous montrent le Ressuscité, nous Le verrons manger des poissons, montrant ainsi qu'il n'est pas un fantôme et qu'il a réellement un corps. Dans le texte d'aujourd'hui, Thomas peut toucher le corps de Jésus qui a gardé les traces de la Passion. L'humanité ressuscitée de Jésus a d'autres propriétés que celles de son humanité avant la Résurrection ; dit autrement, son humanité ressuscitée n'est plus limitée par les contraintes de l'espace et du temps.

Nous retrouvons cette nouveauté à travers le geste que Jésus va accomplir sur ses Apôtres en soufflant sur eux : « Ayant ainsi parlé, Il souffla sur eux et Il leur dit : 'Recevez l'Esprit-Saint.' » Ce geste de Jésus qui souffle sur ses Apôtres peut renvoyer à 2 faits : tout d'abord un geste de création, lorsqu'au début du livre de la Genèse, après avoir créé l'homme à partir de la terre, Jésus souffle sur lui pour lui insuffler son âme. D'autre part, il peut s'agir, chez Saint-Jean, d'une allusion à l'évènement de la Pentecôte que Saint-Jean rattache à la Résurrection, mettant entre parenthèse les 50 jours séparant les deux évènements. Dans le cas où nous regardons ce souffle de Jésus sur ses Apôtres comme un geste de création, cela nous redit qu'il s'agit d'une création nouvelle que Jésus inaugure et transmet, par sa Résurrection, à ses Apôtres.

Enfin cette nouvelle création inaugurée par la Résurrection introduit également une nouvelle temporalité marquée par la précision de Saint-Jean, à savoir que cette apparition a lieu le premier jour de la semaine. Nous sommes donc au début d'une nouvelle temporalité, d'un nouveau début.

Dans un deuxième temps, je voudrais m'arrêter sur le don particulier du Christ Ressuscité à ses Apôtres et à notre monde qui est le don de la paix. Dans le récit de ce jour, Jésus donne par deux fois la paix à ses Apôtres : « La paix soit avec vous. » leur dit-Il. Puis, Il redonnera la paix une 3^{ème} fois à Thomas. Dans d'autres apparitions du Ressuscité, nous Le voyons donner à nouveau cette paix issue de la Résurrection. Quel en est le sens ?

Je crois que le sens premier de cette paix consiste à mettre en paix le cœur des Apôtres qui ont abandonné Jésus, qui ont fui pendant la Passion. À eux se pose cette question : « puisque Jésus est à nouveau vivant, comment va-t-Il se comporter par rapport à nous qui L'avons abandonné ? » La paix donnée par le Ressuscité est avant tout une réconciliation, un pardon de l'infidélité, de la fuite des disciples. Le Seigneur leur donne sa paix et les réconcilie avec Lui-même et avec Dieu.

L'être humain est par essence un être de relations. Mais dans toutes les relations que nous tissons, la relation fondamentale qui structure toutes les autres est notre relation avec Dieu. Et si cette relation avec Dieu est déséquilibrée, alors toutes nos autres relations s'en trouveront perturbées. C'est ce que nous voyons chaque jour dans notre monde. Quand Dieu n'est plus présent, les incompréhensions, les conflits,

les guerres se multiplient. L'être humain n'a pour sa part ni la capacité ni la force de créer par lui-même une relation juste avec Dieu, ce qui détermine profondément la construction de sa vie et de notre société. Seul Dieu peut nous donner cette paix fondamentale, source de la paix, dans tous les autres domaines. « La paix soit avec vous » signifie donc non seulement qu'en ce moment, le Seigneur rétablit la communion avec ses disciples infidèles, mais qu'Il apporte aussi au monde la réconciliation avec Lui, qui structure notre propre relation avec Lui, condition de toutes les autres relations de notre vie.

À la lumière de ce don de la paix il est intéressant de regarder l'échange avec Thomas. Thomas est celui qui refuse de croire tant qu'il n'aura pas vu lui-même le Ressuscité et tant qu'il n'aura pas pu constater que Jésus Ressuscité est le même que Jésus qui a souffert la Passion. Au-delà du doute sur lequel je vais revenir, l'épisode de Thomas nous montre une chose : c'est que Thomas, pour accéder à la foi en Jésus Ressuscité, a besoin de passer par la Passion qu'il a manquée.

Frères et sœurs, on ne peut pas accéder à la Résurrection sans passer par la Passion ; dit autrement, on ne peut pas accéder à la Résurrection sans passer par la Croix. La paix donnée à Thomas est non seulement pardon pour son infidélité, réconciliation avec Dieu, pardon pour son doute, mais aussi paix parce qu'il est enfin arrivé par son adhésion personnelle à la foi en la Résurrection.

Il y a un autre aspect de la figure de Saint-Thomas qui est intéressante dans ce récit : c'est que Thomas est celui qui va refuser de croire sans avoir vu, c'est-à-dire que Thomas est celui qui refuse le témoignage des Apôtres. En apparaissant personnellement à Thomas, Jésus vient confirmer le témoignage des Apôtres. Désormais, l'accès à la foi en la Résurrection de Jésus passera par le témoignage apostolique qui est constitutif de l'Église comme nous le disons chaque dimanche dans le Credo : « Je crois en l'Église une, sainte, catholique et apostolique. » Ceci nous concerne parce que, à moins qu'il y ait des mystiques ou des privilégiés parmi nous, nous croyons tous en la Résurrection de Jésus par la foi qui nous a été transmise et qui repose sur le témoignage des Apôtres qui ont vu Jésus ressuscité.

En ce sens, nous pouvons lire d'une autre manière le fait que Thomas mette ses doigts dans le côté de Jésus. Ce côté transpercé renvoie évidemment à la Passion, mais renvoie également aux sacrements du baptême et de l'Eucharistie, puisque Saint-Jean verra couler de ce côté ouvert de l'eau et du sang, symbole du sacrement du baptême et de l'Eucharistie. Si Thomas croit en la Résurrection en mettant ses mains dans le côté transpercé de Jésus, cela veut dire aussi que l'on peut accéder à la Résurrection grâce aux sacrements, et notamment celui du baptême et de l'Eucharistie qui, en même temps qu'ils nous conduisent à la Résurrection de Jésus, découlent de la Résurrection de Jésus.

Le témoignage des Apôtres est profondément missionnaire puisqu'à mesure qu'ils font l'expérience du Ressuscité, ils annoncent la bonne nouvelle de la Résurrection. Cela veut dire qu'on ne peut pas dissocier l'expérience du Ressuscité du dynamisme missionnaire qui en découle. La mission de l'Église découle de la puissance de la Résurrection. Croire en la Résurrection de Jésus sans l'annoncer est incomplet. Annoncer le Christ sans avoir fait l'expérience de la Résurrection est vide. Avant d'être missionnaire, il faut avoir vécu, il faut avoir construit une relation avec Jésus et avoir fait d'une manière ou d'une autre l'expérience de la Résurrection. C'est la raison pour laquelle, Frères et Sœurs, la Pentecôte qui marque l'envoi de l'Église en mission clôt le temps pascal. Il faut d'abord former les Apôtres à l'expérience de Jésus Ressuscité avant qu'ils ne soient envoyés en mission dans le monde.

Que la figure de Saint-Thomas sur laquelle nous méditons en ce dimanche renforce notre foi en la Résurrection de Jésus pour affermir notre dynamisme missionnaire. Amen !